

### Goener ar groas.

Dar Goener ar groas da kresteiz  
 Goëlet Jesus wa truezus  
 Kement kroassant a tremene  
 ar taoliou fouet ken a goulie.  
 Dalek ar pen petek an troad  
 Na wa nemert gouli a goad.

Pa he an teir mary gant an hent  
 tri mab yaouank a renkontrent  
 Ni o salud tri mab yaouank  
 ar Salud zo kaer ag excellent  
 Ker koulz dar c'hoz evel dar yaouank

— Ni zo o distreī deus ar menez  
 Goude ober langroas nemes(1)  
 Lakad eur profet da c'hourves  
 Gant goulou tan leterniou kloz  
 ag i mouchet gant an diou poz.

— maroud te gwir mab da zoue  
 Divin piou n'deus da skoët ?  
 — An eb en deus va skoët en deus va skoët  
 Deus va paradoz a c'heo privet.

tri mil hine a voa c'hoaz  
 ag en ivern losket poaz  
 Ken a voa on salver biniget  
 o Lamas ol deus a bec'het  
 o Lamas ol bihen a bras  
 Leveromp ol deo gratias.

Pater noster principal  
 Gwir a sinceris dan ordinal  
 eun deīz a zeuī eb lakad mar  
 Biskoas na vezo goeled e bar.  
 E frallio ar veïn e sec'ho ar goës  
 E serro an noz en kreis an de.

Dar iaou ambluk pa serras nos  
 nen devoa ken Jesus da repos.  
 De vinigou muan karet

Da Per en deus bed lavaret  
 Per a ben ma pezo va diansavet  
 Da laret biskoas na poa ma goëlet  
 An dra ze a re eur glac'har em chalon  
 ma dihanzo en eb feçon.

Ar bassion neb e goufe  
 Gant eur bater e lavare  
 eun ine da Zoue a zilifre  
 a biken en peuns an ivern na koefe  
 na dan erouan nen dafe  
 a da petare eur fin vefe. (2)

Anaïc Cozic, 9bre 1850.

(1) *Le ms a : nemes ; faut-il lire newes ?*

(2) *Les deux derniers vers, et le nom de la chanteuse (avec la date) sont écrits dans la marge de gauche de la page, transversalement.*